

bremañ



DIWAN

Tost da
2000 den
e Roazhon

EUSKADI
jahinerezh

TIBET
distruj
an natur

KENTELIOU BREZHONEG

E BREST

Kentelioù noz war 5 live, aozet gant Kanevadenn, e Ti an Holl an Harteloire. Titouroù digant Iwan Kadored 98.28.10.37 pe 98.01.39.96.

E PLOUZANE

Kentelioù noz evit an deraouidi, aozet gant Kanevadenn. Titouroù digant Doming Chorlay 98.45.08.83.

E KEMPER

Kentelioù brezhoneg (3 live) ha yezhoù all, aozet gant Multilangues. Evit gouzout hiroc'h, pellgomz da Yann Gwilhamod 98.59.65.16.

E ROAZHON

Kentelioù noz gant Sav-Heol e Skol Liberté. Deraouidi, eil ha trede bloavezh. Titour gant Mark Kerrain 99.30.22.89. (18e-19e)

E GWENGAMP

Kreizenn Sevenadurel Vrezhon "Roparz Hemon" a ginnig deoc'h evit ar bloavezh 93-94 Kentelioù brezhoneg (4 live). Kentelioù dafis (2 live), kentelioù kan e brezhoneg, kentelioù sonerezh (telenn) hag ul levr-raoueg (ouzhpenn 700 levr), diskouezadegoù, prezegennoù, ha festoù-deiz bep miz. Evit an holl ditour, degemeret e vez an dud bemdez etre 2e ha 6e g.k. (lun d'ar Sadorn) plasenn Verdun e Gwengamp - Posubl eo pellgomz d'an niverenn 96 44 27 88.

E REDON (Ti Kendalc'h)

Staj d'an daouilamm aozet gant Skol An Emsav d'ar 27 ha 28 a viz Du. Digor eo ar staj-mañ d'an holl liveroù (deraouidi d'al live aotreegezh). Titour 99 38 75 83

E PORZHIG

Skoazell Diwan Sant-Brieg a ginnig deoc'h ur Friko "choukroul". Kregiñ a rae gant ur banne digor kalon da 19e 30, pred da 20e 30, Fest-noz adalek 20e 30. Disadorn 18 a viz Kerzu e sal ar gouelioù Porzhig evit enskrivañ pellgomz da zDiwan Sant-Brieg 96.78.27.60.

Brezhoneg er Skinwel

Resevet hon eus ul lizher a-berzh Noel Lainé a lavar skrivañ avel anvetour evit respont da Fañch Broudig. Dre ma z'eo hir-tre e lizher ne vo kavet amañ nemet arroudoù anezhañ. N'eo ket laouen Noel Lainé e vefe bet kollet ouzhpenn ur c'hard er abadennoù bep sizhun gant tud Breizh-Uhel.

"Raktresoù a bouez emeur o sevel e Bro Skos hag en Iwerzhon, div vro gail. Palet'h emañ hon hini?..."

Rebec'h a ra c'hoazh Noel Lainé da Fañch Broudig "n'eo ket digor servij foran ar skinwel d'an holl, da gement mennozh n'eo ket hoc'h hini"... Evit ober outañ ar goullenn-mañ "Daoust ha dazont ar brezhoneg a vez en ho preder pa bedil tud d'ho programmoù?..." Anvaz a ra ivez Noel Lainé "Plismigañ ne servijo da netra. Goulennoù a chom avat : peseurt dazont zo evit ar brezhoneg war ar skinwel? Peseurt dazont zo evit kelenn ar brezhoneg war ar skramm? Peseurt dazont zo evit kement bugel, kement krennard a zo o teskiñ brezhoneg er skol, gant e dud pe e vignoned? Peseurt dazont zo evit hor yezh er servij foran?..."

Evit reiñ e soñj fraezh war-lerc'h : "Bez e tle ar skinwel bezañ ur benveg da herzel lazhadeg hor yezh ha dioren hec'h implij ar vro a-bezh"... Evit echuiñ e tispleg Noel Lainé perak ez eo bet dilezet ar brezhoneg gant tud ar vro hag e lavar "Afer ar brezhoneg er skinwel hag er skingomz n'eo ket un afer lizhet, met da gentañ met un afer bolitikel. N'eo ket gwir marteze? sellit ouzh ar broioù all neuze?". (...).

Korvoerezh ar maouezed

Lizher digor da skipailh-ren Bremañ Plijadur hor bez o resevet Bremañ atav ha vad a ra dimp kaout keleoù diwar-benn hon bro e-keil ma vevomp pell diouzh Bro Vreizh hevlene. Ret eo anzav ivez ez eo aet ar gelaouenn kalz war-raok e-keñver an danvez hag an doare-kinnig (nebeutoc'h a bennadoù gwalhir ha muioc'h a geleier) : emañ war hent da zont da vezañ ur gelaouenn a-live gant ar re a-vicher. Fellout a ra dimp, avat lâret pegen feuket omp bet o welet war an niverenn 144 (Gwengolo 93) un dresadenn bet savet gant Nono o tiskouel ur paolo redek etrezek ur vaouez en-noazh, digor he divrec'h evit e zegemer gant ar gerioù-mañ : "Plijus eo deskiñ brezhoneg..." Un doare bruderezh e oa war ar seblant evit Gerihudur Martial Menard. Arabat deoc'h krediñ ez eo puritaned ac'hanomp -rak gortoz a reomp gallout prenañ an oberenn-se pa zeulo er-maez rak d'hor soñj e vo anezhi un oberenn dalvoudus evit hon yezh. An dresadenn hec'h-unan ez eo kentoc'h a gavomp ken skrijus. Sur mat ez eus lod eus o lennerien/ezed o dije he c'havel lentus 'm eus aon, hogen d'ar soñj-ni e tlefe Bremañ bezañ ur gelaouenn araogelur ha mat e vefe d'ar skipailh-ren prederiañ un tamm hiroc'h diwar-benn seurt tresadennoù a zo evit gwir korvoerezh e-keñver ar maouezed.

O klask adsevel Breizh emañ holl hag ur chañs vras hon eus, d.l.e e c'hellfomp mar karfomp sevel ur Breizh Nevez diazezet war ar c'haneglev hag ar c'hevatalded, ur vro renet gant ur spered araogadour na petra 'ta. Mat e vefe deomp neuze klask en em zizober diouzh ur seurt emzalc'h korvoñ sot-se gant al levezonet m'emaomp gant skouer Bro C'hall dreisthoall.

Klaskomp 'ta mont war-raok gant hon preder er cheñver-se ha paouez da implijout ar maouezed, an heñvelrevourien hag all dres evel ma vez implijet skeudenn ar Bretonezed hag ar Vretoned (kv. Becassine) gant yoc'hstlenn Bro C'hall. Kalon vat deoc'h-c'hwil holl evit al labour diaes met pouezus-se.

I. Kerduo, N. Baxter Sant-Jakez, Galisia.

Diwan bev dalc'hmat AN ENKADENN A ZEIZ DA ZEIZ

11/09/93 : bodet en Uhelgoad e vot Kuzul Merañ Diwan ur mennad o tegemer komzoù an Ao. Ministr Bayrou a zisklerie en Oloron-Sainte-Marie (Okitania) "e felle dezhañ diskoulmañ da vat kudenn an darempred etre ar skolioù zo o fal tizhout an divyezhegezh hag an Deskadurezh Stad". Anvaz a ra ar mennad ez eo mall-bras dibab etre an daou zevad nemeto a gloc gant lezannoù ar Stad C'hall : enbarzhadur pe gevrat hervez lezenn Debré. O vezañ m'en deus diskouezet ar Stad ne fell ket dezhi kemer e karg diorren ur steudad kelenn evel hini Diwan, e kinnig ar C'huzul Merañ digeriñ ur prantad studiañ etre e zileuri diwan hag an Deskadurezh Stad diwar-benn ar c'hevratou Debré.



4/10/93 : disoc'h ar prosez war klemm an URSAFF e lez-varn Kemper. Diskleriet eo Diwan en "adsav lezennel" ; kondaonet eo gant al lez-varn da "adsevel" ha kempouezañ e gontoù. Ur merour zo anvet. C'hwec'h miz zo roet da Ziwan evit diskoulmañ kudenn an die. Spi a oa gant Diwan e vefe bet goursez gant ar varnadenn, amzer dezhi anavezout disoc'hoù he strivoù, anavezout pishoc'h ivez ratozhioù ar Rannvro hag an Departamantoù, ha dreist-holl kaout kevratou hervez

"lezenn Debré". Evel un taol penn-bazh e kouezh ar varnadenn. 4/10/93 : e-tal savadurioù ar C'huzul Rannvro, e Roazhon, e sav implijidi Diwan ur voger brikennoù arouezus-kenañ. Nach'et en deus Yvon Bourges o degemer, prennet eo outo dorioù ar C'huzul. Diskleriañ a ra Bourges : "Foiltrañ archant an dud a reont, gortoz a ran ur budjed sirius". 9/10/93 : bodet en Uhelgoad e tiviz an implijidi, a-du gant ar C'huzul Merañ gervel d'ur vanifestadeg e Roazhon.



Galv tud bugale Diwan En arvan emañ hor skolioù hiziv. Petra 'ra ar bolitikerien? Rebec'h deomp hon diaesterioù arc'hant. Daoust hag emskiantek Int e gwirionez eus o c'hirlegezh, dirak hor sevenadur o vont da get? Ar re yaouank, er bloavezhioù 200, a c'houlloeno diganto perak o deus lezet hor yezh da vervel...

**EVIT DIFENN DIWAN
1800 DEN
E STRAEDOU
ROAZHON**

13/10/93 : Renner Diwan hag an implijidi en em gav e Landerneve gant an Aotrou Geniteau, ar merour anvet gant al lez-varn. Klask a reont e lakaat da gompren n'eo ket Diwan an embregerezh a vez aozel ennañ mekaniko pe boestadoù-mir, met ur skol a vez kelennet ha stummet enni bugale, Breizhiz an dazont.
23/10/93 : manifestadeg vras e Roazhon.
Miz Du 93 : kenderc'hel a ra ar stourm ■



Abaoe manifestadeg Kemper, daou vloaz zo, ne oa ket bet bodet kement a dud er straedoù evit difenn Diwan. Splann eo evit tud Diwan ne c'hell dont an diskoulm d'o c'hudennoù arc'hant nemet eus ar C'huzul Rannvro. Sioul e voe ar vanifestadeg, kalz a vugale enni, a c'houlenne digant Yvon Bourges "reiñ arc'hant da skolioù ar vro". Dlead ar C'huzul Rannvro eo kas ur politikerezh yezh war-raok ha sikour gant he arc'hant unan eus arouezioù pennañ ar stourm evit ar brezhoneg, a lavare en o c'hemennadennoù ar strolladoù o doa galvet da gemer perzh er vanifestadeg : sindikad CFDT Diwan,

Stourm ar Brezhoneg, sindikad CFTD ar skolioù prevez, Ar Re C'hlas, UDB... Kalz e klevor komz er c'hazetennoù eus ar "strivou graet gant ar C'huzul Rannvro" evit skoazellañ Diwan. E gwirionez, evel ma lavare an UDB en he c'hemennadenn, ez eus bet roet 6,6 milion a lurioù da Ziwan gant Rannvro Breizh en ur ober 5 bloaz, da lavaret eo 2 lur evit pep annezad... E penn kentañ miz Du e vo degemeret dileuridi Diwan gant an Aotrou Bourges. E miz Kerzu e vo manifestet adarre, mar bez ret ■
Mich Beyer hag Iwan Kadored

UN DISKOULM ?

Abaoe ur pennadig amzer e oa kaoz e diabarzh ar gevredigezh Diwan eus un emglev gant ar Stad C'hall. Un emglev e renkle statud ar skolioù-se a-fed lezenn hag a aesafe o mont-en-dro, paneveken war dachenn an arc'hant. E miz Gwengolo en doa dibabet kuzul-merañ Diwan ober eus ar skolioù brezhonek skolioù "dindan kevrat", evel ar skolioù katolik, kentoc'h eget mont e reizhiad ar skolioù Stad.

Abaoe bloavezhioù e c'houlenne Diwan e vefe roet d'ar skolioù brezhonek ur statud a-berzh Stad o toujañ d'o doaroù kelenn. Votet o deus izili Kuzul-merañ ar gevredigezh a-du gant gouenn ur statud par da hini ar skolioù kristen, o deus "kevratoù" gant ar Stad, hervez lezenn Debré. "Ret-mat e oa doomp dibab etre reizhiad ar skolioù "dindan kevrat" ha reizhiad ar Stad, rak re arvarus e leue saviad hor skolioù hag hor skolaerien, ha re Ziaes e oa doomp klask en em gvel gant ar melestradurezhioù". Dre ma n'eus ket a blas e reizhiad kelenn ar Stad evit skolioù e brezhoneg, emezo, hon eus kavet gwelloc'h dibab hent ar "c'hevratoù kevrediañ" hervez lezenn Debré. Kinniget e vo an diskoulm-se da Gendalc'h dreistordinal Diwan a vo dalc'het dizale, ha ret e vo da bennoù Diwan neuze studiañ a-dost gant dileuridi ar Stad penaos sinañ kevratoù ar seurt-se ■

I. Kadored



bremañ 146 - miz Du 1993

An "égallité" hervez an URSSAF

Dlead a ra an O.M. (Olimpik Marsilho, evit ar re na daolont ket evezh ouzh darvoudoù pouezusañ hon amzer) 39 milion -nav milion ha tregont- d'an URSSAF. Dre c'hañs n'eo ket da URSSAF Su-Penn-ar-Bed pe, gwashoc'h c'hoazh, da URSSAF ar Morbihan e tie ar paour kaezh Bernard Tapie an arc'hant-se ! Mod all, e vefe a-benn bremañ war ar plouz. Marteze e c'hellfe Diwan gouenn e vefe treuzkasat e zle da URSSAF Marsilho ?

Evit an Ervod-se ez eus bet feurmet 500 karr (a zoare), degaset 50 karr nevez-flamm pladennel "Sommet de Maurice" -ha n'eo ket eus Maurice Papon e oa kaoz !-, degaset 3 600 poliser ha feurmet an holl ostalerioù a zo en hanternoz an enezenn. Pet skol Diwan a vefe tu da sevel gant an arc'hant dispignet eno da skoazellañ impalaerouriezh sevenadurel Bro-C'hall ?

Jedonezh ha furnez

Emañ ar P.S. o vont d'ober ur gest vras e-touez e vilantide. Spi, esper, goanog o deus e renieren da zastum 3 milion a lurioù. Gant Diwan ez eus bet dastumet 1 milion 6. Kuden jedonezh evit bugale skolioù Diwan : o vezañ ma'z eus bet dastumet 1,6 milion gant Diwan ha m'en deus spi ar P.S. da zastum 3 milion ; o vezañ ma'z e eo poblañs Bro-C'hall 15 gwech brasoc'h eget poblañs Breizh ; o vezañ ma'z eus 1 100 bugel e skolioù Diwan : gouenn 1 : Pet den a zo er P.S. e Bro-C'hall ? gouenn 2 : pet den a zo er P.S. e Breizh ? gouenn 3 : hag-eñ ne vefe ket talvoudusoc'h da Sokialourien Vreizh kas o skoazell da Ziwan kentoc'h eget d'ar P.S. e Pariz ? Pet gwech talvoudusoc'h e vefe ?

P.D.

SKINWEL

Goude ma vije bet embannet gant ar gouarnamant gall edo o vont da grouiñ ur chadenn skinwel nevez en diskar-amzer 1994, "ur chadenn evit ar sevenadur hag an deskadurezh", e c'houlenn ar strollad politikel "Frankiz Breizh" e vefe roet bod da "gelenn yezhoù rannvro ar C'hwec'hkorn" war ar ganol skinwel nevez-se, evit, emezo, reiñ harp d'ar pezh a vez graet er skolioù.

Kentañ salons
liesyezhek al
levrioù bugale e
Breizh
KEMPER
11-12
a viz Kerzu
1993

**DELWENN
MARKIZ AR ROUERI**

Lidet e voe koun ar "C'honorol Armañs", Markiz AR ROUERI, e Foujera, d'ar 17 a viz Here, ouzh troad un delwenn nevez savet en e enor, gant dileuridi kêr Foujera, Kuzul Meur Il-ha-Gwilun ha Kuzul Rannvro Breizh.

Mervel a reas Markiz ar Roueri, saver "Kevredigezh Breizh", d'an 30 a viz Genver 1793, e-kichen Lambal, pa oa soudarded an Dispac'h Gall war e lec'h (s.o. *Bremañ miz Here 1993, p.17*).

A-enep ar galloudoù saoz ha gall e stourmas ar Breizhad-se. Evit ma ve anavezet gwelloc'h e istor eo e lakaas "Komite ar Roueri" sevel an delwenn-se, e kenlabour gant pennadurezhioù Breizh ha gant Emglev amerikan Flora Gould. Gant un arzour eus skol ar "Seizh Breur", Jean Freour, eo e voe kizellet.

J.-Y. Touz

a zehoù Yann Bouessel du Bourg, Philippe Mouazan, Robert Korengold (kannad S.U.), Michel Mohr



SCOLA 93 20 000 DEN ER SALOÑS

Evit ar pevare gwech ez eo bet dalc'het «SCOLA», saloñs europat an deskadurezh, 21/24 a viz Here e Roazhon. Aozet gant kêr Roazhon ha skoazellet gant Kumunlezh Europa, SCOLA en deus bodet 100 stand e-pad 4 devezh : tiez-embann, brolioù all, sindikadoù, kevredigezhioù, ha dedennet 20 000 den hervez an aozerien.



Marie JAN, telennourez, ha Denez PRIGENT. Ar re-mañ o deus sachet an dud etrezek tachenñ ar brezhoneg hag hini Skol-Uhel Ar Vro, 'tal kichen. Malo LOUARN en deus bet d'ober ouzhpenn 60 tresadenn d'ar Gwener evit ar yugale deut eus skolioù Diwan ha Liberté, Anne Marie JAN ha Denez PRIGENT o deus kemeret perzh en abadennoù "forom kreiz" ha filmet int bet gant skol selled-ha-klaved Skol-Veur Roazhon II.

welout tropadoù bugale o tremen buan-ha-buan gant ar pal nemetañ dastum ar pezh a oa evit netra. Evit ar pezh a sell ouz ar c'hendivizoù, da skouer «Ar skol : demokratelaat hentoù ar ouiziegezh» pe «Kelennadurezh ar yezhoù : evit piv, evit Petra, penaos», n'o deus ket degaset elfennoù evit ur preder sirius. Bez' e oa kentoc'h darn vrasañ an dud o tremen o amzer o komz, pe zoken o flapañ. Er c'hontrol, an abadenñ savet gant ar re yaouank hag evit ar re yaouank, d'ar Sul da noz e Ti ar Sevenadur, a oa dispar hag he deus diskouezet ar pezh e oant gouest da sevenñ war dachenn ar sport, an arz, an dañsoù, ar sonerezh ...

AVC

Ene ar saloñs

Un taol-kaer eo a zo bet kaset da benn, gant ar stand «SKOLIQU BREIZH» o krouiñ un darvoud berdezh. Pedet e oa bet arzourien da zont : Malo LOUARN ha Reun LE HONZEC evit an dresourien, an istorour Reynald SECHER, Anne

Un dra bennak a vank

Daoust da se ez eus peadra d'an em soñjal war «SCOLA». Kalzik eus ar standoù a oa yen a-walc'h ha ne ginniget ket kalz a draoù. Lod eus ar brolioù estren a oa dipitet un tamm o


BREZHONEG E KUZUL AODOÙ AN ARVOR

Un ugent bennak a implijidi eus Kuzul Meur Aodoù an Arvor a heuilh bremañ kentelioù brezhoneg evit o feurstummañ, abaoe derou miz Here. Goude bezañ gweladur evit Stumdi -ha da heul skouer Kuzul Penn-ar-Bed- o deus kargidi ar stummañ er C'huzul kinniget kement-se d'an aotrou Tremel a'n deus roet e asant ha daou live kentelioù a vez roet gant Stumdi.



BREST "NOZVEZHIOU PENN AR BED" KANERIEH HA SONERIEH A VREIZH E TI AR SEVENADUR

En diskar-amzer 1992 e oa bet kentañ abadenñ "Mouezhioù Breizh" e Brest. Fellet en deus da Jacques Blanc, rener ar c'h-Quartz (Ti ar Sevenadur), adober ha diorren kement-se ar bloaz-mañ gant peder abadenñ anvet "Nozvezhioù Penn ar Bed". An hini kentañ a voe klevet enni kanerien hengounel (Yann-Fañch Kemener, Annie Ebrel, Denez Prigent...) ha sonerien a vremañ (Jacques Pellen, Patrick Molard...), ha leun-chouk e voe ar sal, 1500 den enni. An abadennoù all a voe "Nozvezh Manu Dibango", "Nozvezh Sonaozourien Breizh" gant Laz-seniñ Breizh o seniñ oberennoù Charles Tournemine ha Paol ar Flem, ha "Nozvezh ar Sonerien a Vremañ" o seniñ oberennoù ar sonaozour eus Maroko Ahmed Essyad.



Paol AR FLEM, sonaozour breizhad, aet da anaon e 1964 d'an oad a 103 bloaz

KEMPER

MARC'HAD NEVEZ PRODUIOU "BIO"

Pemzektez zo bremañ ez eo bet digoret war an ton bras, marc'had nevez produioù naturel Kerfeunteun e Kemper gant Jean Claude JOSEPH, eil-vaer e-karg eus an aferioù ekonomikel. Bep sizhun e vo dalc'het ar marc'had etre 4 eur ha 7eur d'abardaez, d'ar Gwener. Tost da 20 marc'hador eo a oa staliet evit gwerzhañ kig, keuz, vioù, yer, frouezh ha legumaj liesseurt, holl gant al label A.B. Mennozh ar marc'had-se zo deuet da heul un diviz gant ar broduerien "bio" boas da zont da werzhañ o legumaj bep Sadorn er c'hoc'h, c'hoant ganto kreskiñ niver ar pratikoù en ur c'harter all evit chom hep ober kevezerezh da varc'had ar Sadorn. Daoust d'ar produioù naturel ha dreist-holl al labour-douar bio kentañ evit a-boan 1% eus ar marc'had e soñj d'ar broduerien ez eo ret krouiñ lec'hioù-gwerzhañ ha boazioù evit gwelout an traoù o vont war-raok.

AVC

AN ORIENT

KAMMEDOUIGOU WAR HENT BREZHONEKAAT AR PANELLOU

Tamm-ha-tamm e weler en Orient disoc'h disklariadur ar c'huzul kêr e miz Genver 1992 "diwar-benn kas war-raok yezh ha sevenadur Breizh". Emeur o lakaat panelloù brezhonek war holl savadurioù "sevenadurel" kêr (levraouegoù, Skol ar Sonerezh, Palez ar C'hendalc'hioù, Skol-Veur...). Ensavadurioù all zo o tont da heul ivez : an Aerborzh, e Plañvour, ma weler panelloù teiryezhek (gallek, saozneg ha brezhoneg), ar Post, ar Porzh-Houarn, ur stal bennak evel al levrdu "La bouquinerie"...

BERRIEN

Da heul an diviz bet dalc'het e Berrien e miz Here 92, aozet gant Dastum, e vo dalc'het e Parthenay ur c'hollok anvet «Demokratelzh sevenadurel ha keodedelezh europat», eus an 11 betek ar 14 a viz Du 93. Titour : 49 94 90 70.

KRISTENION BREIZH

• Ur brezhoneger, Herve Keltieg, 28 bloaz, a zo bet beleget d'an 18 a viz Gwengolo e Brest. Bevet an deus dreist-holl en afrika hag e Partz, e-lec'h m'en deus desket ar yezh, e-raok mont da veleg evit eskopli Kemper. Divyezhek e oa ar bedadenn d'e velegiaj.
• Kentelioù brezhoneg a vez kinniget ar bloaz-mañ e Klerdi. Gwened evit danvez beleien Breizh-Izel.
• Evit ar wech kentañ abaoe pell, pell 'zo, ez eus bet embannet div bajenn hollvezhonek (gant un diverradurig gallek evelkent) e karnadig eskopli St Brieg (24/9), diwar-benn ar perak ez eo mat darc'hel d'ar brezhoneg e pardonioù ar vro daoust da goazhadur ar yezh e-touez an dud...
• D'ar Sul 10 a viz Here da 15 eur e kinnig OALED SANT ERWAN (28 str. Berthelot e Brest - 98.28.31.13) d'ar vrezhonegerion e korn-br Brest, gweladennñ chapel Sant Jaoua, ambrouget gant Filip Lanuzel, en deus skrivet ur pennad diwar he fenn e AL LIAMM diwezhañ (278-279 p. 263-271).

Armoù nukleel

Dirak al lez-varn etrebroadel
Ha ma vefe enep-lezenn an
armoù nukleel?



11 000 gwiraour a embann ez eus c'hoazh
lezennou enep an armoù nukleel. Nac'hañ
a ra ar stadoù o deus ar Vombezenn
kement-se.

Embann a reomp start ez eo didalvoud
seurt armoù hep mar na marteze. Nebeud
a stadoù o deus anezho, met niverus-
stank e vint dizale ma ne savomp ket
enep. Evit skoazell an dizarmañ e ranker
kaout ul lezenn. Mard emaoac'h a-du,
skoazellit ar galv-mañ d'al Lez-Varn
Etrebroadel. Hon amboaz eo lakaat an
armoù nukleel enep-lezenn. Lakait ho sin
ouzh an disklêriadur-mañ en anv emskiant
an danelezh. Lakaet e vo gant milieroù a
sinadurioù all deuet eus ar bed a-bezh.
Lizher skouer : Disklêriadur en anv
emskiant an danelezh gant hoc'h anv hag
ho chomlezh.

"Embann a ran d'ar bed-holl em eus gwir
da vezañ dieubet diouzh an arvar nukleel
hag ez eo ma diead ober na vefe ket
pusunet ar rumadoù da zont gant
efedoù skinobrius. Embann a ran ez eo
ober implij eus an armoù nukleel un torfed
enep an danelezh.

Peogwir ez eo an armoù kimiek ha
bevoniel berzet endeo gant ar gwir
etrebroadel e savan klemm da holl izili
Aozadur ar Riezou Unanet evit ma
c'houlennfent ouzh al Lezvarn Etrebroadel
reiñ hec'h all war statud lezennel an
armoù nukleel".

Sinit ha merkit an deiziad.

Lod eus an dud hag eus ar c'hevredigezioù a
skor ar Galv eo ar re-mañ : The International
Association of Lawyers Against Nuclear
Arms, International Physicians for the
Prevention of Nuclear War, The World Peace
Council, Womens' International League for
Peace and Freedom, Pacific Concern
Resource Centre.

Kasit ho lizher da George Farebrother,
World Court Project UK, 67 Summerheat
Rd. Hailsham, Sussex UK

bremañ 146 - miz Du 1993

Tizhout ur boled gant ur boled all BRUDOU FALL WAR UN TAOL KAER

Pep hini en deus dalc'het soñj eus
rakiun meur Ronald Reagan, ar
Strategic Defense Initiative pe
kentoc'h difenn belloniell, kalz
brudetoc'h dindan an anv skiant-
faltaziek a "vBrezel ar stered". Met
disoñjet e tefe bezañ gant an darn
vrasañ eus an dud ar c'hur sabatuz
bet kaset da benn evit diskouez d'ar
bed holl edo gant an Amerikaned ar
barregezh hag ar c'hourdeknologiezh
da gaout o mennad : sevel ur
reizhiad hag a c'hellfe distrujañ
bannadelloù Soviediz, kent bezañ
tizhet ganto. E miz Even 1984 e voe
distrujet un ICBM - pe bannadell
etrerannved - bannet eus
Vandenberg Air Force Base (Ca.)
gant ur fuc'hell vannet eus
Kwadjalein, en Enezeg Marshall. E
kreiz ar Mor Habask e legouezhas ar
c'henstok, ken resis ha ken kreñv ma
'z eas penn-brezel ar vannadell a
dammoù bihanoc'h eget 2,5 sm.
"Tizhet e oa bet ur boled gant ur
boled all", hervez pennadoù meulus
embannet neuze er media amerikan.

Diskred war ar c'hur meur

Hiziv an deiz ez eus disfiz war ar
c'hur-se. Falsed e vije bet an traoù
hervez pennadoù embannet gant
kazelennoù amerikan zo. Derc'hel a
ra renerien an arnodenn da larout e
voe sturiet ar fuzeenn diwar-bouez
un detektor infra-ruz santidik-kenañ,
hep implijout tamm ebet ar
merkskigner a oa e bourzh ar
vannadell. Ar merker-se ne dalveze
nemet da wiriekaat ne zheñche ket
ar vannell diwar he zreug. Ne
nac'hont ket avat e oa bet tommet
penn-brezel ar vannell evit reiñ
dezhañ ur sinadur infra-ruz
splanoc'h. Ar penn-se a oa bet
karget ivez gant danvez-tarzhev evit
merkañ gwelloc'h lec'h ar
daspakidigezh, ar pezh en deus
sikouret ivez da vruzunañ ar gwenn.

Piv eo an douellerien? Piv zo bet touellet?

Lakaat anat e vije bet falsed
emplegadoù an dennadenn a vefe un
dismegañs evit an ijnourien hag ar
vilourien o deus aozet anezhi. Ne
vefe ket ken mezhus-all e sell eus ar
stadamaezh amerikan, peogwir en
deus sikouret kalz ar seurtanvet taol-
kur da gendrec'hiñ ar Soviediz ne
oant evit kenderc'hel da gevezañ
ouzh an Amerikaned war dachenn ar
reizhiadoù belloniell. E diskaridigezh
ar renad soviedel e voe a-bouez ar
soñj e vefe bet dispredet a-barzh
nemeur ar reizhiad bannadelloù
etrerannved, en doa koustet ker-ruz
d'an ekonomiezh soviedel. Touellañ
an enebour a zo bet a-viskoazh
lodenn gaerñ ar c'hoari evit ar re a
bled gant ar bellerezh pe
strategiezh. Keilidsteuriv an SDI a zo
bet 31 miliard a zollarioù betek-hen,
ha 40 miliard ouzhpenn a zo bet
mouezhiet evit ar c'hwech vloaz a
zeu. Tud zo er C'huntell (Congres)
hag a zo gwallblijet pa glevont anv
eus un taol-arnod treuzellet ■



JAHINEREZH, FEULSTER HA TREUZKELAOUIÑ

Euskaki : ar peoc'h war un
hent-dall

Mervel a ra 2 Euskarat etre daouarn
ar polis. Un trede zo kaset d'an
ospital "en ur stad mantrus" hervez
ar vezeien. Ur miz goude e varv ur
jeneral e Madrid, dindan boledoù 3
den masklet.

Gurutze Yanci, 31 bloaz, zo marvet e
Madrid goude 36 eurvezh tremenet
gant an enklaskerien. Harzet e oa bet he
gwaz d'an 21 a viz Gwengolo ha lezet da
vont didamall tri devezh goude ; harzet e
voe Gurutze d'an 23 ha setu ar pezh a
gont Juluan, he gwaz : "e komiserdi
Donosti zo bet lakaet ur sach plastik war
ma fenn. Skoet zo bet warnon un eurvezh-
pad. Goude-se e Madrid em eus bet
taolioù war ma c'hilpenn ha ma daouarn.
Er gell dostañ em eus klevet ma gwreg o
pasat. He anavezet em eus dre zindan ar
barrinier, gwelet a raen he bragoù hag he
sandalennoù. Klevet em eus ur yudadenn
o tont eus al lec'h ma oa goulnnataet. Ne
c'helle ket kerzhet ken hag he lakaet o
deus war ur gador-ruilh. Un eil gwech em
eus klevet anezhi o yudal, war un ton
skiltrus. D'am soñj e oa abalamour d'an
tredan. Goude he deus komzet gant ur
gward." D'ar poent ma lezont Juluan da
vont, e kemennont dezhañ marv e wreg.

Un infarctus dic'hortoz

Hervez ar polis he doa Gurutze lavaret he
doa poan d'he skevent. Mezeg an
Audienzia Nacional, dre bellgomz, a
gemennas dezhi kemer pastilhennoù
Muorex. Un eurvezh diwezhatoc'h e voe
kaset d'an ospital, ken fall ez eo he stad.
Mervel a ra un eurvezh goude,
kemennadenn ofisiel ar polis : marv eo
Gurutze Yance diwar un infarctus.
Xabier Kalparsoro, 26 bloaz, zo marvet e
Basurto d'ar 27 a viz Gwengolo. Harzet e
oa bet d'an 23. Hervez ar polis en deus
lammet dre ar prenestr. Kaset d'an ospital


Politikerezh



e c'houlenn d'ar c'hlahvdioureuz "lezit
ac'hanon hag e lavarin deoc'h pep tra."
Operataet eo dindan evezh ar boliserien.
Mervel a ra 2 devezh war-lerc'h. Skrivañ a
ra Enbata en e fennad-stur : "Ar muntr
demokratel : un hengoue eo e doareoù ar
polis bolitikel an emiaz dre ar prenestr.
Ne gontir mui dre ar bed ar stourmerien
hag an enebourien bolitikel adkavet
krouget en o c'hell pe marvet en ur
gouezhañ dre gwallzarvoud er skaller.
Ur banne bier zo bet kinniget dezhañ
Jose-Luis Corcuera, Ministr an Diabarzh,
a embann eus e du : "un enklask a vo war
kiriñ gant ar polis emren euskarat, ha
bremañ ivez polis ar stad hag ar guardia
civil". Diskleriañ a ra e oa bet fennet e
droioù-brech d'ar prizoniad ha kinniget ur
banne bier dezhañ. "Ne vez merzet warnañ
arouez ebet e vije bet gwallgaset."

ur jeneral hag hini un Euskarat e vo gwall
ziaes strollañ an enebourien ouzh taol ar
peoc'h, daoust d'ar pezh a weler hiziv e
Palestin hag en Iwerzhon.

M.B.



Jose-Luis Corcuera, Ministr an Diabarzh

JAHINEREZH

Troidigezh ur varzhoneg savet gant ar Pastor
Niemöller marvet e 1937 en ur c'hamp nazi.

Dont a reas an nazied da zastum ar
gomunourien
Tevl a ris, ne oan ket komunour
Bac'hañ a rejont ar sokialdemokratel
Tevl a ris, ne oan ket sokialdemokrat
Dastum a rejont ar yuzevien
Tevl a ris, ne oan ket yuzevien
Klask a rejont war ar gatoliked
Tevl a ris, ne oan ket katolik
Dont a rejont d'am c'herc'hat
Ne oa mui den evit sevel ar vouezh
Marrin Niemöller

miz Du 1993 - bremañ 146

DISTRUJ AN NATUR E BRO DIBET

Gant an emsaviou e 1987 hag e 1988 e oa bet dibikouzet o daoulagad d'an dud diwar-benn planedenn "rust ha kalet" Bro-Dibet, ur vro hag zo dindan tred gant Sinaiz abaoe 40 vloaz. Gwelet e oa bet menec'h o skeññ mein war polsed. Klevet e oa bet er c'houlz-se ivez, e vaze mac'hagnet merc'hed ha krennardezed en un doare euzhus, kult dezhe da c'hellout kaout bugale ken, e veze gwallet ha palforset leoned ha leonezed gant pennbzhler tredan. An delz a hiziv ez eus, a greder, ur milion a dud a zo bet gwallgaset gant ar glanaadur pobi-se !



D'ober 'zo komz ouzhpenn eus an diaes ma 'c'h eo d'ar 6 milion a Dibetaniz bevañ e-kichen 8 milion a Sinaiz. Ar re-mañ zo deut dre gaer pe dre heg, ha poan o devez o vevañ en ur vro ken uhel, dishevel a-grenn an amzer enni diouzh hini bro-Sina.

Bro Dibet disoñjet

E 1989 e oa bet roet priz Nobel ar Peoc'h d'an Dalai Lama, ardamez stourm ar bobl dibetan. Goude ma vez gouezet bremañ pegen spontus eo planedenn Pobl Bro-Dibet, ne vez ket sellet kement-se ken ouzh ar vro ken pell-se, bremañ p'emañ Bro Sina kompinour o tegemer reolennoù an ekonomiezh liberal ha p'emañ ar vro-se o klask diskouez eo ur vro "evel ar re all", evit klask zozañ C'hoarioù Olimpek ar bloavezh 2 000. Setu ma vez ankouezet mui pe vuil emsav "Nevez Amzer" Tien An Men hag emsaviou Lhassa, lakaet ur fin dezhe diwar goust gwad an emsaverien. An natur, avat, mad an holl, n'ankoua ket an droug zo bet graet dezhi. Merket eo da viken gant sotonioù bet graet da "vodernaat", kousto pe gousto, ur vro, en desped d'ar reolennoù a defe bezañ sentet oute da virout an en-dro e stad vat. Deut eo Bro Dibet da vezañ klaf-bras an natur, ha dinerzh a-grenn an ekonomiezh enni. Ma vefe anezhi ur vro dizalc'h, e vefe

renket ar 153vet a-douez 160, diouzh he Froduadur Broadel Strizh. Gant ur gonid a 450 lur ar bloaz, n'emañ ket ar vro-se evit bevañ he foblañs ken, rak digoadet eo bet ar c'hoadoù, d'rañhet ar peurlc'hioù peuret gant loened re niverus, ha disec'het al lennoù dre forzh dourañ parkeler. Mervel a ra en bihan 150 diwar mil a boupigou eno, ha 43 diwar 1 000 e Sina.

Torret ar c'hempouez

Brudet gwechall evit bezañ ur vro c'hlas, stank ar c'hoadeler enni, eo bet an troc'hañ gwez drastus evit Bro Dibet. Foranet 'zo bet un hanter eus an 221 800 km2 a goadoù a oa er vro e 1949, dre troc'hañ anezhe forzh penaos ha dre forzh lakaat tan enne. E traoñienn Kama, e refer d'ar menez Everest, e teu ar brug roz da vezañ ral war diribinoù an Himalaya, hag int stank gwechall koude. Aet eo al loened war digreskiñ ivez, diwar ar brakoniñ hag ar chaseal gant ... mindrañherzed. En arvar emañ an natur pa goazh an niver a c'houennadoù en ur vro ma oa enni 10 000 seurt plant dishevel, 108 gouennad a vronneged, 506 gouennad a evned, 44 gouennad a amfibiennezh ha 61 c'houennad a besked. Kalz a-douez al loened-se zo prest da vont da get, en o zouez al louparded erc'h, chaseal gant Sinaiz. Diouzh an I.U.C.N.

(International union for conservation of nature and natural resources), ez eus an tregont bennak a c'houennadoù prest da vont diwar wel. Ar memes tra eo evit plant, ur c'hard eus ar gouennadoù anezhe na vez kavet nemet e Bro Dibet, ha mil anezhe mat d'ober louzou. Peuret e vez re peurlc'hioù ar vro, 70% eus gorread ar vro anezhe, evit sevel loened kig. Diouzh ar studadennoù bet kaset en-dro gant S.D. Richardson e 1988 ha gant G. E. Clarke e 1987, eo torret ar c'hempouez a oa etre an douar hag an niver a loened e koulz ar bastored tibetan, diwar kreskiñ re ar chatal.

Dour veuz aliesoc'h aliesañ

En em gavout a ra an doareoù labour douar fall-se en ur vro hag a zo a bouez bras evit douerier Azia en he fezh. Ret eo kaout soñj, avat, ez eus e Bro Dibet, ken bras anezhi ha pemp gwech Bro C'hall, 14 menez uheloc'h evit 8 000 metrad. Hag eno emañ mammennoù brasañ steroù Azia : Indus, Ganj, Brahmapoutra, Huangho, Yang Tse, Mekong ha Salwee. Diwar an troc'hañ koad hag ar re beuriñ, en em gav ble an douar ha mont a ra da heul ar glaveier hag an erc'h, o kargañ evel-se steroù hag a oa karget mat a ouezennoù a-raok. Setu perak e kred d'un toullad gouizelien e teu an darn



Toenn ar bed saotret, mastaret ha distrujet digastiz

vrasañ eus an talioù dour beuz en Indez hag er Bangladesh diwar fals oberennoù Sinaiz e Tibet. Merzet o deus e oa bet dour beuz kalz aliesoc'h abaoe 30 vloaz, dreistholl en Indez gant taladoù dour beuz spontus ar Brahmapoutra e 1987 hag e 1988. E Bro Sina zoken 'zo en em gavet darvoudoù a'r seurt-se. Diwar lavarioù Sinaiz o-unan, 'zo bet klevet e oa bet brasañ kaouadoù dour beuz ar c'hantved e 1981 war tachennoù ar steroù Huangho ha Yang Tse.

Kreizennoù nukleel

Mont enep krenn d'an natur ivez, setu ar pezh a ra ar politikerezh kaset da benn gant Sinaiz da gaout energiezh. Moaien e vije bet da sevel kreizennoù dour-tredan bihan peotramant implijout energiezh an heol (war-lerc'h ar Sahara, hag a zo er memes lec'hed ganti, eo e Bro Dibet eo an aezetañ ober gant nerzh an heol). Met aet eo sinaiz da sevel ur pezh mell kreizenn tredan war al lenn Yamdrok, brasañ lenn disall e norz d'an Himalaya, ul lenn ma kaver tro-dro dezhi holl nevedoù ha

lec'hioù sakr ha sevenadurel ar bobl dibetan. Pa vez kaoz eus an energiezh nukleel, e vez, evel-just, diaes-tre gouzout hag-eh eo bet doujet d'ar surentez gant Sinaiz o lakaat fuzennoù atomek en Tibet. Ar pezh a ouvezer, avat, eo e oa prest Sinaiz, abaoe 1984, da ginnig Bro Dibet da boubellenn evit lastez nukleel broioù ar c'hornog ! Duzhpenn se 'zo bet gouvezet, digant Greenpeace da gentañ, ha gant ur studiadenn savet gant ar gazetenn Sunday Morning Star e 1989 da eil, "zo bet implijet d'ober "temz" evit al labour douar lastez fall evit ar yec'hed deut diwar an uzin a ra war-dro dourioù lous Baltimore, er Stadoù Unanet, lastez hag a vez difennet implijout en U.S.A. penegwir int barrek da zegas klefvedoù grevus d'an dud.

Choaz hon dazont

Ha derec'hel a ray "Toenn ar Bed", hon zoenn deomp holl, da vezañ saotret, mastaret ha distrujet digastiz gant ar re a ra gant ar ger "modern" evit reiñ un abeg

d'o skrapadennoù ha d'o lazhadegoù ? Ne ra Sinaiz nemet adlavaret komzoù goullou an holl drevadennerien, pa roont da c'houzout eo divarrek Tibetaniz da gas o bro war-raok er bed a-vremañ. Ma 'c'h int ken divarrek-se, penaos displegañ o deus gallet Tibetaniz en harlu en Nepal lakaat war-sav ur produadur tapisoù hag a ro labour da 30 000 a dud ? Bloaz goude KeJaded Veur an Douar e Rio, ha klevet e vez c'hoazh dre ar bed ar pezh a lavare an Dalai Lama eno : "Gwechall e veze distrujet an natur dre ziouer a ouiziezh. Bremañ pa c'hellomp gouzout muioc'h, eo a bouez bras deomp gwelet pegen prizioù eo ar bed deut deomp war-lerc'h hon zadoù, ha kompren eo deomp da choaz e petore stad a romfomp anezhañ d'ar rummadoù a deuy war hon lerc'h." ■

Diwar ur pennad savet gant Frédéric Prouteau ha Luca Guérin, embannet e galleg war CDF-Magazine, niv.186 here 1993, lakaet e brezhoneg gant Lorañs Guillaume.

Geriou diaes :
Gouezenn : sédiment
Brug roz : rhododendrons
Bla 'triable (evit an douar)
Trevadenner : colonsalutur

STANKELLOU

Chalusoc'h-chalusañ e teu kudenn an dour da vezañ evit dazont Breizh. Daoust ha ne oa ket pennañ danvez emvod-meur diwezhañ ar Re C'hlas ? Komz a reer, amañ hag ahont, a sevel stankelloù. Kalz a eneblezha a sav a-enep dezho alies, evel e Penn-ar-Bad. Ur raktres stankell all a zo ivez e Gorre-Breizh, degemeret fall gant tud ar vro hag an ekologourien.



Ul lodenn eus Breselien beuzet

Emañ er mare-mañ o studiañ ur raktres stankell, a veuzle traonienn an Av, etre Pemont ha Begnon. Tregont metrad bennak a zour a vefe da live ar stankell, da lavaret eo un dek metr bennak a-us da Bont al Lann. Hervez ar re a sav a-enep ar raktres e vefe drastus eledoù ar stankell war meur a dachenn.

Nebeutoc'h a weladennerien

N'ous nemet div flondrenn e koadoù Breselien : flondrenn an Av hag ar Stankenn hep Distro. Ar raktres a zistrufe gweledva brav-kenañ flondrenn an Av hag ar wendenn-vale hir 37 a gollfe he zennad bravañ, an hini a hed ar stér war meur a gilometr. E-pad an hañv n'eo ket da besketa e leuler war vord al lann, da welet ur fankigell flaerius e vefe kentoc'h pa ouzer ne vefe ket a zour ken er miziou tomm.

Riskloù nevez

An takad a vefe beuzet a zo anezhañ ul lec'h pinvidik-kenañ e-kefiver plant ha loened. War zisteraat ez ale eta pinvidigezh ekologel ar c'hoadoù. Chalusoc'h c'hoazh marteze : ar

pep brasañ eus dour ar c'hoadoù a vefe gwazhiet war-zu ar mirllec'h dour. Kalz muloch a riskloù taniou-gwall a vefe eta en takadoù disec'h.

Diberc'hennadurioù da zont

Anat eo e vefe diberc'hennet kalzik tud hep ne ve goulnet tra ebet outo. Gouzout a reer ivez e vefe troc'het an hent departamant. Troc'het da vat diouzh Pemont ha koadoù Breselien e vefe Begnon. Deuet da vezañ un hent-dall ne chomfe nemet un dra d'ober gant ar gumun : peuzizeriañ ha mervel.

Arouez Breselien

Koadoù Breselien zo deuet da vezañ koadoù mojennek, nevezik zo gwir eo, hogen n'heller ket nac'h an dra. Daoust hag an hunvre, a laka kened ha speredelezh da c'henel n'eo ket ivez a "dalvoudigezh foran", a c'houlen difennourien al lec'h.

Olier ar Mogn

Mar fell deoc'h gouzout hiroc'h : S.O.S. Breselien
Pont al Lann
56380 BEGNON

Sevel stankelloù en India Ar vinorelezh enep an Narmada

Mac'het-kenañ e vez an advasied (kentañ anezdi India) daoust ma ne glever keloù ebet diwar o fenn : a-dreñv skeudenn un demokratelezh gandhiat bugelel, n'o devez ar meuriadoù kinnad ebet er breudoù hogos, hag e c'houzañvont ur machomerezh armerzhel dibaouez. Da geflver 16vet gouel ar filmoù e Douarnenez e plede Tribal Act, Aozadur dic'houarnamantel a souten ar pobloù henvroat, gant kudennoù an Advasied : goude degemer douaroù diestrenaus da goulz an dieubidigezh o deus ar Stadoù hag ar gouarnamant kreiz kavet an tu da ziberc'hennañ ar meuriadoù eus o douaroù, o troc'hañ neuze al liamm dreistpar a oa kenetrezo hag steuziañ o reizhiad kevredigezh.

Un nebeud raktresoù diorren a ziskouez splann saviad pemdeziek an Advasied : ar raktres sevel stankelloù an Narmada (stad Maharashtra) pe ar Subarnareka Multipurpose Project (Stad Bihar) a laka en argoll darn eus ar pobloù henvroat. Ar raktres diwezhañ-se savet e 1974 a zo ur gwir koll-arc'hant ; rakjedet e oa bet 12,9 milion roupi d'e gas da benn, hogen hiziv ez eus bet foran 100,5 milion roupi end-eeun.

Danevell Morse

Dilec'hierzh an henvroidi hag an diorren gaoantel a vo goude savadur ar stankell zo un dreistarvar evit endro an henvroidi. War ar marc'had n'o devez ar re-se tamm gounid diwar al labour-se pa ne vezont ket gopret da gemer perzh ennañ. En ur rannbarzh pinvidik a gailh hag a goad e teu pouezus skodoù al lec'hiañ hag an enplantañ granterezhioù nevez. Evit-se e ranker skarzhañ an henvroidi a c'helle azgoulenn gwirioù, gant gwir abeg. Evit a sell ouzh raktres an Narmada, bet savet e 1987, e laka war var ur milion a dud hag endro ur vro a-bezh. Embannidigezh an danevellskrid Morse e 1992 a zisklêrie ne oa bet biskoazh studienn ebet war eledoù savadur ar stankell bennañ war an endro hag ar boblañs. War a hañval e vo kudennoù bras a stouadur hag holended an dour. Rak-se ez eus bet savet ur stourmadeg ouzh ar program an Narmada Bachao Andolan a zegemeras ar Priz Nobel Kenstur e 1991. Met hep gwir Frankiz da gomz, o deus ezhomm ur skoazell etrebroadel evit bezañ klevet.

Yann-Varc'h Thoret

ISTOR BREIZH EN TOULL-DISKARG

Ret-mat kaout an dizober dlouzh al lastez a broduomp bemdez. Pa n'eo ket aet an advezañ buan a-walc'h war-raok e vez c'hoazh klasket lec'hioù da vezañ toullou-diskarg.

Saint-Marcellin

Rakdibabel e oa bet 50 lec'h gant Burev-Rannvro an Douaroniezh hag ar Mengleuzioù (BRGM). A-douez an 50 lec'h-se e oa bet dibabet 11 da gentañ, 5 da c'houde hag er fin ne vane nemet 2 lec'h : Avezeg ha Baen-an-Oud. Hemañ diwezhañ an hini a voe dibabet da vat : kêriadenn Saint-Marcellin war gumun Baen-an-Oud.

Gwezenn o sevel a-enep

E-touez ar re zo o sevel a-enep d'ar raktres toull-diskarg emañ ar c'hevredad Gwezenn e-mesk ar re oberiantañ. Goulnenn a ra digant S.I.V.O.M. Bro-Redon dilezel lec'hienn Saint-Marcellin ha lakaat an toull-diskarg renkad 2 en ul lec'h didalvoud e-kefiver natur ha pell a-walc'h diouzh ar c'hêriadennoù.

Distruj an endro


Unan eus takadoù naturel steuñv implij an douaroù Baen-an-Oud eo lec'hienn Saint-Marcellin. Ur rouedad gwendennoù, priziet-kenañ gant ar valeerien, a gas da buñsoù niverus hag a zo evel testoù eus ur gwelead-dour danzouar a c'hallfe bezañ talvoudus-kenañ. Aon-bras a zo e vefe saotret da vat ar gwelead-dour-mañ.

Nepell diouzh al lec'hienn e kaver ul lec'h anvet "Le Champ des cailloux", anezhañ ur park kloz, kelc'hiet a vlochoù-maen gwenn bras, dianav o orin.

Mur a zevezh-arat a vefe da zigadañ evit staliañ an toull-diskarg. Se a vefe c'hoazh ul lodenn ouzhpenn eus ar rouedad brouskoadoù a ya d'ober ur reizhiad ekologel hollet evit buhez al loened hag a yafe da get.

Fae ouzh hengoun ar vro

Tre-kichen kêriadenn Saint-Marcellin emañ lec'hiet ar raktres toull-diskarg.




Un hir a istor he deus ar gêriadenn-mañ. He milvet deiz-ha-bloaz zo bet lidet hevlene. Anavezet gant al lezenn ez eo Breuriezh Saint-Marcellin. Bep bloaz e vez dalc'het ur pardon e chapel Breuriezh Saint-Marcellin. Hag hi adsavet e 1947, ar chapel-mañ zo dres war al lec'h ma voe roet e gurunenn da Nevenou, en 847, gant menez Sant Konwoien. Gant ar Pab e oa bet roet ar gurunenn-mañ a lakae Nevenou da vezañ roue kentañ Breizh. Nepell diouzh al lec'h anvet "La Bataille" (An Emgann) emañ ivez kêriadenn Saint-Marcellin. Eno e voe faezhet arme Karl Voal, douaren da Garl Veur. A-drugarez d'an trec'h-mañ e voe dizalc'h Breizh adalek 845. Diaes-bras eo ijinañ lidañ trec'h Ballon e flaez lastez 18 kumun eus Bro-Redon...

Raktres degemeret...

Daoust d'an holl arguzennoù a-enep ez eo bet degemeret da vat raktres an toull-diskarg gant izili S.I.V.O.M. Bro-Redon : 18 a-du, 14 a-enep ha 6 neptu. Estreget Gwezenn e talc'h Kevredad Difenn Endro Saint-Marcellin da stourm ouzh ar raktres. Hep kontañ eneberezh Maer ha kuzul-kêr Baen-an-Oud ■

Olier ar Mogn

Goulnenn a ra ar c'hevredad Gwezenn digant an holl kas ul lizher-klemm da renerien ar S.I.V.O.M. Chomlec'h S.I.V.O.M. Bro-Redon
Straed an Ti-gar
35600 REDON
Evit gouzout hiroc'h
Kevredad GWEZENN
5 straed Guy Pabois
35600 REDON
Pgz 99.72.20.62



GOLWG
KAZETENN SIZHUNIEK
BRO-GEMBRE

5 bloaz zo, e 1988, eo bet krouet ar gelaouenn GOLWG (Gweled, doare an traoù). Ur gelaouenn sizhuniek eo, moulet brav ha modern he neuz. E liv penn-da-benn e teu er-maez bep sizhun adalek miz Gwengolo 1993 (Betek-henn ne oa e liv nemet ur sizhun bep miz).

Golwg - 13 stryd y Bont
Llanbedd Pont Staffan
Dyfed SA48 7LX

Kembraeg aes

Kavet he deus ar gelaouenn he flas e-kichen Y CYMRO a zeu er-maez bep sizhun ivez. Y FANER, ur sizhunieg all, a zo aet da get ur pennadig zo. Ur gelaouenn evit tud lennek e oa hag un tammig mod -kozh e oa evit lod. Gant 7 implijad he deus kroget GOLWG ha dek int bremañ. Kinnig keleler ha pennadoù a bep seurt, war ar sevenadur dreist-holl, en ur c'hembraeg aes da lenn hag eun, da lâret eo ur yezh pemdezlek, ez eo pal ar gelaouenn. Skarzhet e vez ar gerioù diaes pe lennek. C'hoant he deus GOLWG da virot ar yezh er bobl en ur lakaat anezhi da lenn. Kinnig a ra GOLWG pennadoù diwar-benn ar sevenadur poblek : filmoù, filmoù TV, politikerzh Bro-Gembre, arz, lennegezh ha sport. Skoazellet e vez gant Cyngor Celfyddydau Cymru/Welsh Art Council, a bae pajennoù zo, ha gant Cyngor Llyfrau Cymraeg/Welsh Books Council. Lennet e vez evel-se barzhonegoù pe danevelloù berr-tre gant tud ne oant ket boas da lenn

lennegezh, eun a-walc'h zoken. 2 pe 3 bloaz zo eo bet roet ar Gador, en Eisteddfod, d'ur paotr yaouank en doa savet ur barzhoneg diwar-benn ar c'hoari rugbi. Tud a zo bet plijet gant ar varzhoniezh ha re all... gant ar rugbi displeget. Tud zo o deus kroget da lenn barzhoniezh evel-se !

Lennerien yaouank

87% eus lennerien GOLWG a zo etre 18 vloaz ha 55 bloaz. Ar pep brasañ anezho avat a zo war-dro 40 vloaz. 3500 a dud a bren GOLWG, dre goumanant pe niverenn ha niverenn. En Eisteddfod 1992 e oa bet graet un enklask. War a seblant, ma'z eus 20% eus kembraeg o komz kembraeg, n'eus nemet un nebeud anezho o lenn ingal. C'hoant zo gant GOLWG hag he yezh eun da lakaat pep hini da lenn. Skolioù zoken a implij ar gelaouenn evit o c'hentelioù ken aes eo ar pennadoù.

Penaos ez eus tu da GOLWG bevañ ?

Skoazellet e vezont neuze gant Cyngor Celfyddydau Cymru/Welsh Art Council. Met se n'eo ket a-walc'h. Bruderezh a vez paet dezho e pep niverenn. Hag evel m'he deus c'hoant ar gelaouenn da chom hep bezañ ankeniet gant skoaziadennoù arc'hant, a zeufe pe na zeufent ket, implijidi GOLWG o deus savet un embregerezh PAO. Evel-se e vez implijet ar binvioù efedus-tre a zo ganto evit sevel ar gelaouenn met ivez evit gwerzhañ o servijoù. Tamm-ha-tamm vo tu dezho da vezañ emren e-kefver arc'hant.

O welat kement a startijenn hag a vicherouriezh en ur skipailh kazetennerien ez eo sur ne rai GOLWG nemet kreskiñ ha kenderc'hel gant al labour lakaat kembraeg da adkavout ha da beurzeskiñ o yezh.

Annaig Renault

GOUEL AR C'HOARIVA

Evit an ell gwech e vo aozet gouel ar c'hoariva e Brest e miz Du o tont.

Tellr abadenn

-D'ar gwener 26 a viz Du da 8e 30 e vo c'hoariet "Puñs ar sent", ur pezh-c'hoari bet skrivet gant Synges, gant Strollad Plougin.
-D'ar sadorn 27 a viz Du da 8e 30 e vo c'hoariet daou bezh-choari bet skrivet gant O'Casey "Poent mont da gousket" ha "Nanny zo 'vont kuit" gant Ar Vro Bagan.
-D'ar sul 28 a viz Du da 4 eur e vo c'hoariet evit ar wech diwezhañ "Benn warc'hoazh e vo deiz choazh", bet savet gant G. Kergourlay, gant Teatr Penn ar Bed.
An holl abadennoù a vo aozet e sal ar Stella e Bourk Lambezelleg e Brest. Prizioù a-ratozh evit ar strolladoù.

John Millington Synges

Ganet eo bet John Millington Synges er bloavezh 1871 e-kichen Dulenn en ur familh a vourc'hizien protestanted. Goude bezañ bet o ren ur vuhez foeter-hent en Europa ma n'eus bet klasket ober ar vicher soner, en em ro d'al lennegezh. Evel ur bern skrivagnerien eus e rummad oad e tremen un nebeud bloavezhioù e

Paris. Yeats. Goude ez a da vevañ en enezennoù Aran e-touez ar beizantled hag ar basketourien. An endro-se an hini a vez kavet peurluviañ en e oberennoù. E oberennoù a nevesao al lennegezh saoznek hag iwerzhonek penn da benn. War un dro ez eo un testani eus e sevenadur holvedal hag eus e gwizioù en doare-douar gouezelek.

Puñs ar sent skrivet gant J. M. Synges.

Berr-ha-berr. Ar pezh-c'hoari-mañ a c'hoarvez er menezioù diganvez reter Iwerzhon un nebeut kantvedoù 'zo... Ar meneg-mañ graet gant Synges a ziskouez an oberenn-mañ evel un oberenn varzhoniell. Krefvaet e vez c'hoazh gant c'hoari daou paour-kæzh den dall da gentañ ha paret diwezhatoc'h gant ur sant, hag o tizoleiñ pegen trist ha kalet eo ar bed tro-dro dezho ■

AR VRO BAGAN E SANT-MALOÙ

Kreizenn Sevenadurel Sant-Maloù a ginnig deoc'h mont d'ar Sadorn 6 a viz Du e ti ar c'hevredigezhioù (strad Ernest Renan) da arvestiñ ouz ar pezh-c'hoari "AN ARAR HAG AR STERED" c'hoariet gant strollad ar Vro Bagan. Pezh savet gant Sean O'Casey.

SKOLIG AL LOUARN

Addigoret eo bet ti "Skolig al Louarn" e Plouvien, e Bro-Leon, e-barzh savadurioù nevez, goude ma vije bet damziskaret an ti un nebeut mizioù zo. Eno e vo meur a sal gant ar gevredigezh a bled gant ar brezhoneg ha gant sevenadur Breizh evit kinnig diskouezadegoù war istor ar vro hag evit reiñ bod d'un dastumadeg vray a levrioù a denn da Vreizh. Gant "Skolig al Louarn" e vez kinniget kentelioù brezhoneg bep sizhun, evit ar re vras hag evit ar re vihan, hag embannet e vez levrioù brav savet gant bugale ar skolioù kristen. Ul levr nevez zo da zont er-maez a-raok dibenn 1993 : "Komzoù tud va Bro" e anv, ennañ krennlavarioù ha rimadelloù e brezhoneg hag e gallaoueg, dastumet gant tremen 2000 bugel eus Breizh a-bezh. Bez' e c'haller rakpreañ "Komzoù tud va Bro" evit 100 lur, digant Skolig al Louarn, BP 13, 29860 Plouvien ■

I.K.

Bep daou viz lennit
AL LANV
59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper
Koumanant bloaz : 130 lur
Skoazell adalek 160 lur




Teatr Penn ar Bed

Mervel, ha buan !

Bevañ a reer pelloc'h-pellañ an deiz a hiziv, a drugarez da gement teknik bel ijinet gant Mab-Den. D'ur mare ma vez sevenet kement kefridi ha kaset da benn kement labour kalz buanoc'h evit gwechall en deus pep hini ach'hanomp amzer e-leizh a-hed e vuhez evit ober ar pezh a gar. Ar pennoù trist, tud yaouank BGS anezho, a responto atav n'o deus ket amzer. Ar re fur, ar re gozh hervezan, a lâro :
"Div, teir amzer 'n deus an den
N'eus nikun heñvel ouz eben"
Met din-me, pa welan skrivet war bez un den kozh a oa sañset, d'am meno, bezañ fur al lizherennoù-mañ : d.o.d. e teu ur blaz c'hwery war ma muzelloù : Piv a zesko deomp kemer an amzer evel ma teu ma ne gemer ket zoken ar re gozh amzer da vervel ha da gultaat ar bed-mañ war o fleanig ? Y.F.

DIWALLIT D'AN DINOZORED WAR AN HENT

Dont a-benn da adkrouiñ loened gouez marvet miliadoù kantvejoù 'zo abaoe (Doue d'o fardono), a zo aes awalc'h evit paotred ouizieq ha speredek ar sinema hogen kalz diaesoc'h evit jenetikerien hor c'hantvedni... O lakaat n'o dije netra - gwelloc'h d'ober.



"Dinozor disensus lentigus"

N'eo ket a-benn arc'hoazh derc'hent an devezh ma vo breset, flastret ha dornet an artichat e parkoù plac'h he fladenn-nij gant treid ponner hag ivinet krahv ur vandennad dinozored aet e breskign pe ma vo huchet 'bac'h d'an uiou-dinozor' gant marc'hadourezed foarioù Vreizh a-benn dedennañ praktikoù mod nevez. Rak, evit c'hoazh, daoust d'an holl jenetikerien da anvout brav kenañ an doare d'ober klonajoù, e chom pep hini deus an "abiliñ doctored"-se o fri war ar gloued pa vez kaoz deus an "ober" e unan. N'int ket da damall dreist muzul e gwirionez rak kudennou diniver, e talv ar boan sellout ozh oute, a harzh oute a dostaat ouz ar pal burzhodus : adkrouiñ gouennou loened a oa aet da anaon pell zo dija da vare an ebetel.


Da gentañ penn e rank an adsaver-dinozor kaout patrom-jenetik al loen, da laret eo, ur "v/molekulenn-asid-dezoksiribonukleik" petramant c'hoazh, an ADN a gaver ennañ patrom bev al loened pe an dud.

Lakaomp e teufe a-benn hon den da gaut tammigoù ADN, dre gĩañ warni, hag e vije posubl gante adsevel ul volekulenn ADN en he fezh, e rankfe hermañ c'hoazh paotreañ anezhi. An dra-se e oar an den hen ober aes pe aesik nemet ne oar ket re vat an holl ar jenetikerien penaos adrenkañ an tammigoù ADN ac'h a d'ober ur volekulenn evit ma vije honnezh disi ha heñvel poch ouzh unan naturel. Un torr-penn hag un uz-buhez an hini eo dezhe evit c'hoazh abalamour e chom bepred toullouigoù e-barzh chadenn an ADN e-keit ha ma vez tammigoù ouzhpenn ne oar ket e-pelec'h o c'hlenkañ. Lakaomp adarre alato e teufe a-benn hon doktor Folamour mod nevez da ziskoulmañ ar gudenn-mañ, rankout a rafe c'hoazh kaout un ù (vi) hegarat awalc'h da zegemer ar volekulenn-ADN-dinozor nevez krouet, un ù baot a zerefe awalc'h war a seblant. Hogen ur skoilh ouzhpenn a gavfe hermañ war e hent da lakaat e holl labour da gouezhañ en e boull bruzhun ; ar molekul ADN a vefe

anezhe molekul ul loen en e oad gour ha n'eo ket re ur c'horfenn-foetus. Molekul ul loen e-kreiz e nerzh a zo achu gante o labour programif ha krouiñ selulennou, stummoù, eskern, izili ha kement 'zo tout, e-keit ha ma chom bev birvidik e-barzh molekul ur grouell an holl nerzhioù yaouank a-benn kregiñ gant al labour ramzel-se. An nerzhioù-se e rankfed o dihuniñ e-kreizik-kreiz ar molekul ADN kozh da beurgas da benn al labour adkrouiñ dinozored, hogen ne oar ket ober an dra-se c'hoazh d'an deiz a hirie. Ha c'hoazh evit ma teufe an dud da greskiñ e familh an dinozored e rakfed reiñ un "Eva-nozor" d'hon "Adam-orus", mod all e chomfe hennezh al paotr yaouank kozh... Gant ar vezh ■

(diwar Science et Vie Nnn 913 miz Here 93- pennad Pierre Rossion "Cloner les dinosaures : du cinéma"-berraet hag adkempennet gant Paskal Tabuteau-Here 93)

GERIOU-KROAZIG gant Mich BEYER Gael niv.10



A-serzh hag a-led :

- Lojeiz.
- Orin un d'Tereza.
- Den.
- Enaoue.
- Annezidi ur poull.

Diskoulmoù gael niverenn 9 : Begek ; ebate ; gadig ; etivi ; kegin.



Alioù fur lipouzenn

Setu miz Du o tostaet ha gantañ ar c'hentañ rev gwenn. Deuet eo ar poent eta da zastum an inn. Ganto e c'hellot fardañ kozadurioù saourus ha marc'had-mat.

Ret eo frotañ an inn unan hag unan evit tennañ diouto o c'hroc'henig tanañ. O lakañ en ur bodez gwer pe bri, goloit gant dour berv ha lezit evel-se e-pad 24 eurvezh.

An deiz war-lerc'h, bervit an dourenn hag adskuilhit ar frouezh enni. Memes abadenn an deiz war-lerc'h. Ar pevare devezh e c'hellot silañ ar chug hag e boazhañ gant BOO g. sukr dre litrad. A-benn 20 munutann, e kaouedo un dakenn chug war un asied yen. Neuze e vo mat da lakaat er podoù.

Ar re a gav mat an evajoù krahv a c'hello kentoc'h soañ ur gwir lipobav gant an inn. Ret e vo kaout 2 lur inin azv-mat, 1 litrad odivi, 2dl dour hag ul lur sukr.

Frotit ar frouezh. Flastrit anezho gant o mein ha tri miz-pad e rankint glec'hiañ en odivi. D'ar poent-se e vint silet. Prientiñ a ret ur siros. Pa vo yen e vo mesket gant ar c'hlec'hiedur hag ar meskaj a vo silet en-dro. Lakat er boutailhoù neuze met ... gortozit ur mizied a-raok tañva !

Mich BEYER

FEST-DEIZ

FEST-DEIZ AR MIZ
KREIZENN
SEVENADUREL
"ROPARZ HEMON"
PLASENN VERDUN,
GWENGAMP),
A VO AOZET
D'AN 28
A VIZ DU 1993, ADALEK
2E HANTER G.K.

Lennit
al liamm

Koumanant bloaz 150 lur (studieren, tud dilabour 100 lur)

Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -

TAOLENN

BREMAÑ niv. 146
miz Du 1993 - 20 pajenn

Kentelioù-noz (neuz)	2
Enkadenn Diwan	3
Manifestadeg Diwan	4
Berr ha Berr	5
Scola 1993	6
Tro Breizh	7
Armoù Nukleel	8
Jahlinerezh	9
Dre ar Bed	10
Dre ar Bed	11
Distruj an natur	12/13
Stankelloù	14
Endro	15
Kembre	16/17
Dudl ha c'hoariva	18/19
35 bloaz kan ha diskan	20

Pennadoù gant Iwan Kadored, Mich Beyer, P.D., J.Y. an Touz, AVC, T.P., Robert Baxter, Herve Kerrañ, Gwenaél Emelyanoff, Laorañs Guillaume, Yann Varch Thoral, Olier ar Mogn, Annaig Renault, Lena Louarn, Paskal Tabuteau, Hegareg.

Skoazell dizelañ gant Iwan KADORED, Olier ar MOGN, Herve KERRAIN, Joël DONNART.

Luc'hskeudennou gant O.F., Mich Beyer, Lena LOUARN, JY TOUZ, Louis BLONCE.

Renerez BREMAÑ : Lena LOUARN

Skrivit e-barzh BREMAÑ / Kasit danvez a-raok an 20 a viz Du ('93 !)

Trugarezec deoc'h.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 Roazhon, BREIZH


Niverenn CPPAP 62974

35 bloaz dirak ar mekanik

AR VREUDEUR MORVAN

Tri breur o vevañ en o zi-feurm, (an hini yaouankañ (59 bloaz) n'emañ ket war e leve c'hoazh ...), hag o kanañ asambles abaoe 40 vloaz : Kan ha Diskan 'zo e festoù-noz Botkol, Pont-Melvez, Purdi-Kintin pe Boulvriag gant ar Vreudeur MORVAN abaoe 1938.

Komzoù bet dastumet gant P. MALRIEU (Musique Bretonne) ha M.C. THOMERE (Ficelle). Brezhoneg gant Bremañ.



An tri breur dirak o zi-feurm

D'an 23 a viz Here e oa bet tolpet 7000 mignon an tri breur, da lidañ ganto o 35 bloaz kanañ. Fañch MORVAN, 70 vloaz, Herri MORVAN, 62 vloaz, ha Youn MORVAN, 59 bloaz, o deus kroget yaouankik da ganañ er festoù-noz («Frioù lous, lezit ar re gozh da ganañ» a veze lavaret dezho d'ar mare-se) e Botkol hag er parrezioù tro-dro. Gant o mamm o doa desket o holl ganaouennoù, hag hi gant he zad, Gwilhom Le GREFF, kaner ha dastumer follennoù-kanañ e fin an 19vet kantved. Tamm-ha-tamm ez eus deut brud bras ganto, hag eus festoù-noz "karter", kant arvester bennak enno, int aet betek festoù-noz bras spontus ar bloavezhioù 70, gant 25 sonenroller war al leurenn, ha kantadoù a zañserien dirazo.

«E 1959 hon eus bet un traktour, neuze ez aemp war draktour d'ar fest-noz. Un tammig buanoc'h». Dizoloet o deus kanerien all, dañsoù all (ar Plin, a veze graet "dañs Plone" anezhañ). 2000 fest-noz a zo bet ganto, en ur ober 35 bloaz. «Traid a vil-vern hon eus bet gwelet o tremen, ha pennoù ivez» emezint. War-dro 80

fest-noz ar bloaz e vuhezkont c'hoazh, stad enno o welet araokadennoù an dañserien : «Er bloavezhioù 80 e veze gwelet tud e-leizh o tont er festoù-noz : diouzh ar c'hiz e oa. Siriusoc'h eo an arvesterien bremañ, dañsourien a-feson 'zo e kement lec'h ez eomp. Anavezout a reont an dañsoù».

Labourat evit ar vro

Komz a reont ivez eus priz ar fest-noz : «P'hon doa kroget e oa 1 lur ar mont-e-barzh, 50 santim evit ar vugale. Un nebeud bloavezhioù en deus padet e-giz-se ... Tud 'zo bremañ oc'h ober ur vicher gant ar c'hanañ er festoù-noz : dav eo dezho kaout gopr o labour, eveljust, hogen n'eo ket yac'h-tre an aferioù arc'hant, neblec'h. Gwelloc'h e vije d'ar festoù-noz bezañ marc'hadmatoc'h, ha niverusoc'h, un tammig e pep lec'h».

«Tud yaouank 'zo bremañ hag a oar komz brezhoneg, ha mat. Met pas an holl, aze emañ an dalc'h. Tud 'zo o kanañ hep meizañ ar pozioù. Chalus eo ! ... Hor youl a zo derc'hel gant ar

pezh a oa araozomp, ha labourat evit ar vro». Ha pa vez goulennet diganto mar kanont e galleg : «En galleg ? 'Oaran ket galleg ! N'on ket bet ba' skol !». ■

